

Perrot Y.- V.

E diwez e leor "Alanig al Louarn" e-noa lakaet ar hanaouennou-mañ

Kanaouennou Brezoneg

Keit 'vo kerreg en aod ar mor,
'Kano ar barz war dreuz e zor
Bepred en yez koz an Arvor.

Luzel

Lakaad a ran amañ da heul toniou ar pennadou 'zo da veza kanet en Alanig al Louarn, eun teskad kanaouennou brezoneg, en-deus bet ar vadelez an aotrou Havas da noti an toniou anezo, evid ma hello kement hini a oar diouz ar muzik tapoud diohtu an doare d'o hana ha beza gouest d'o deski d'ar re all en-dro dezañ. Ar halz anezo a zo nevez savet, ha trugarez a lavaran en an' Doue ha Breiz d'ar varzed o-deus o greet, da veza va aotreet d'o moulla en eul levrig da dalvezoud a-benn Gouel K.V.B. e Kastell Keryann, d'an 12 a viz Gwengolo 1905.

Diou anezo avad a zo koz, koz kant vloaz, hag am-eus dastumet e parrez Sant-Vouga : *P'edon war bont an Naoned* ha *Maro bihan Job al lonker*.

Falvezet eo bet ganen lakaad e-touez ar hanaouennou nevez unanig bennag evel-se euz an amzer-wechall, da ziskouez pegement a draou a hellfed da gaoud digand ar re goz, hag a yelo a-nebeudou, a-nebeudou er bez ma ne gemerom ket ar boan d'o dastum e poent hag en amzer.

Dastumom beteg an tammouigou a jom c'hoaz evid na yelo netra da goll !

J.-M. P.

Disul vintin

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Disul vintin, aba zavis,
O ! ren droñ droñ
O ! la la ri tra,
O ! ren dren dren la ri dena :
Da reded ar had ez is,
tio, o,
Da redeg ar had ez is,
tio o o.

Kanaouenn Paotred ar Sabat

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Dilun, dimeurz, dimerher,
Sachom warni, paotred.
Ha diriaou ha digwener,
Kerzom ganti d'ar red.
An noz 'zo ha teñval.
Brao eo c'hoari ha dañsal.
Piou a deu e Sabat
Da glask e ebat,
gê.

Deomd'ar gêr

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Dizrei 'ran laouen d'am farrez,
Da gaoud va mamm ha va zad.
Gand av zud pa dremenin

'Harz ar groaz e tiskwizin.
Kenavo da drouz ar hêriou.
An eurvad 'zo er mêziou.
Kenavo da drouz ar hêriou
An eurvad 'zo er mêziou.

Kared a rin mor ha menez,
Enno yehed hag êr vad.

Bro goz ma zadou

Heñvedigez

War an ton kaer kembraeg : Hen wlad fy Nhadau.

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Ni, Breiziz a galon, karom or gwir vro !
Brudet eo an Arvor dre ar bed tro-dro.
Dispont 'kreiz ar brezel, on tadou ken mad
A skuillas eviti o gwad.

Diskan

O Breiz ! va bro, me 'gar va bro.
Tra ma vo mor 'vel mur 'n he zro,
Ra vezo digabestr, va Bro !

Breiz, douar ar Zent koz, douar ar Varzed,
N'eus bro all a garan kement 'barz ar bed ;
Peb menez, peb traonienn d'am halon 'zo kaer :
Enno 'kousk meur a Vreizad taer !

Ar Vretoned a zo tud kaled ha kreñv ;
N'eus pobl ken kaloneg a-zindan an neñv ;
Gwerz trist, son dudiuz a ziwan eno,
O ! pegen kaer ez out, va Bro !

Mar deo bet trehet Breiz er brezeliou braz,
He yez a zo bepred ken beo ha biskoaz ;
He halon virvidig a lamm c'hoaz en he hreiz,
Dihunet out bremañ, va Breiz !

J. Jaffrennou (Taldir).

Keltia 'vo da viken

Kinniget d'an Intron Mosher, Bretonnez Tramor.

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

E Skos ema ar hiz, pa roer degemer d'eun den euz or gouenn geltieg, da gana a-gevred, en eur ober eur sort kudennad dorn-ou-z-dorn, eur zon euz ar vrava bet savet gwechall gand Burnes. Setu amañ komzou brezoneg war don ar zon-ze.

En amzer-goz eur gwall-avel
O c’hweza ‘n o goueliou,
Pell diouz douar kuñv o havell,
Argaset on tadou.
En daou d’ar mor don
Daoust m’e’ rannet or gouenn,
Ni a gano a-greiz kalon
Keltia ‘vo da viken !

Ar Zaoz, ar Gall ‘deus or gwasket
Krisoh ‘vid an harlu ;
Plega or penn on-deus ranket
Gwall-dizet a bep tu..
Nerz ar Fallagriez,
Kaer ‘deus beza dibrenn,
Ne dorr ket ar Halvedigez :
Keltia ‘vo da viken !

Doue an Neñv ‘n-eus he hrouet
Da voud eur “Mor a gan” ;
‘Vid d’on daouarn boud chadennet,
Ni ‘gano heb ehan !
« Ar gwir ‘eneb ar bed »
Setu or reolenn !
Hag, evel ar gwir didrehet,
Keltia ‘vo da viken !

Bremañ skoulmom, hervez ar hiz
Euz on tadou gwechall,
P’en em gavom ‘tre kenvroiz,
Hab ganim Saoz na Gall,
Kudenn ar Garantez,
Ha youhom a-bouez-penn,
Ma tassono bolz an êlez
Keltia ‘vo da viken !

F. Vallée (Abherve)

Bleuniou Breiz

Kinniget d'an aotrou Markiz de l'Estourbeillon, Rener K. B. V.

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Da veza kanet e-pad roidigez ar bodou bleun brug da aotrouned K. B. V. en em zastumet e Keryann, d'an 12 a vizGwengolo 1905, evid selaou ha gweled "Paotred Sant-Vouga" o c'hoari "Job al lonker" hag "Alanig al louarn".

Gand ho kleierigou ruz-wenn,
Brug Breiz, sonit heb ehan
Er menez ha war an tevenn,
'Vid an oll gwiribunan.
War an tevenn hag er menez,
Gand an êzennig hejet,
Sonit eur han a levenez,
Rag Breiz a zo dihunet !

Sonit kañv d'an dizunvaniez
Ha d'he diou hoar villiget,
Diegi ha diouiziegez,
Ha galvit ar Vretoned ;
Ha ma ar e zle pep hini,
Beleien ha tud desket,
Tud yaouank ha tud er gozni,
Breiz a vezo adsavet !

Sonit, sonit, kleierigou,
Sonit pell ha sonit kreñv,
Ken na glevo hoh hekleioiu
Ar Vretoned 'zo en neñv,
Ma pedint Doue da deuler
E zaoulagad benniget
War vamm-vro baour ar brugeier,
Ha Breiz ne dremeno ket !

J.-M. P.

Maro bahan Job al Lonker

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Erru Job al Lonker d'ar gêr,
Ha leun e gov gand ar mezhvier.
Erru Job al Lonker d'ar gêr,
Ha leun e gov gand ar mezhvier.
E wreg Jañton he-deus soñjet
Hag e liena he-desu greet.
O driga driga driga,
E liena bremañ
E la roun la, e la roun loun la !

Pa oe 'r horv ganti lienet,
War an daol e oe astennet,
Dour benniget en e gichenn,
Gand eun diou pe deir goulaouenn,
O driga, driga, driga,
E la roun la, e la roun loun la !

Ar wreg da di 'n amezeien
Gand tristidigez hag anken :
« Va Doue, me 'zo glaharet,
Va fried a zo tremenet,
O ! driga, driga, driga,
Dre ar gwin en noz-mañ. »
E la roun la, e la roun loun la !

Evel m'ema ar hiz er vro
D'arvesti ar horvou maro,
Pa oa an hanternoz sonet,
An den-mañ skuizet o kousked,
O ! driga, driga, driga,
'Deuas da zihuna,
E la roun la, e la roun loun la !

Job o selled en-dro dezañ
A lavaras en eur grenañ :
« Petra ma'z on-me lienet
Da veza n'on ket tremenet.
O ! driga, driga, driga,
Ha follet ar re-mañ ? »
E la roun la, e la roun loun la !

An arvesterien ne glevjont,
War ar varv-skaon, Job gand e gont,
A grog pep hini 'n e gador
Evid gelloud tizoud an nor.
O ! driga, driga, driga,

Kemend a spont o-doa.
E la roun la, e la roun loun la !

« Va fried paour, eme Jañton,
Me 'm-eus glahar ha rann-galon ;
Lakaet em-boa toulla daou vez
Evid mond ganeoh assemblez,
O ! driga, driga, driga,
Ha kuitaad ar bed-mañ.
E la roun la, e la roun loun la !

Kanet din gand P. Mocaer, euz bourk Sant-Vouga.
J.-M. P.

Netra ne dalv va Breiz !

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Ha bez' ez eus eur vro 'giz Breiz-Izel
Diazezet gand kalz a dud santel ?
Ar hantvejou, 'vel bandennou brini,
Heb he diskar o-deus nijet drezi.

Klaskit eul leh heñvel ouz Breiz-Izel,
A jom ennañ, en despet d'an avel,
Kredennou sakr oberourien or bro
Korvigellet ouz gwriziou an dero !

Ha bez' ez eus eur vro 'giz Breiz-Izel
E leh ma kan ar barz a vouez uhel,
Gand an delenn, evel an drouiz koz,
Koulz hag en neñv élez ar baradoz ?

Ha bez' ez eus eur vro 'giz Breiz-Izel,
Eur yez ken koz, ken kaer ha ken santel,
Gand ar Gelted komzet daou vil bloaz 'zo,

Hag enoret ganeom-ni c'hoaz hirio ?

Ar Hallaoued, siwaz ! gwir a laran,
D'ar brezoneg a ra brezel bremañ ;
Hogen, Breiziz, Doue a-du ganeom,
Ouz ar gwasker : kaloneg, enebom !

Nann, a dra zur, n'eo ket eun den marveg¹
A ziskaro e Breiz ar brezoneg !
Eur boblad tud n'hell beza dispennet
P'eo ar membrou etrezo unanet...

Ha bez' ez eus eur vro 'giz Breiz-Izel,
Leh ma kaver labour kaer ar gizell
E pep parrez war vein an ilizou,
Er berejou, war galz a galvariou ?

Ha bez' ez eus eur vro 'giz Breiz-Izel,
'Roas buhez da gant den a vrezel
Brudet, Lez-Breiz ha Richemoñ,
Gwesklin, Arzur, Pontkalleg ha Klison ?

En da istor, O ! va bro Breiz-Izel,
Me 'gav barzed evel ma'z oa Luzel,
Brizeug, Kere, Kervarker ha Milin,
Heb ankounaad, en amzer goz, Marzin.

Ha komz a rin euz a Zent Breiz-Izel,
Hag a skignas sklêrder an Aviel
Dre ar vro-mañ, en deñvalijenn c'hoaz,
O planta don war bep torgenn ar groaz !

Netra ne dalv, ha netra ne dalvo,
Va Breiz-Izel, va mamm garet, va bro !
Va harantez, beteg eur va maro,
Heb ehan, d'az meuli, me garo !

Klaoda ar Prad

¹ marveg : ?

Kan bale tud Breiz

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Sao Breiz-Izel, d'an neh da vantellou
Ruziet gand gwad or hendadou !
Stagom d'or gouriz ar hlezeier hir,
Ro vo on divreh kreñv evel dir !

Lavarom oll euz a-bouez or penn :

An oll

Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

Dihun, Breiz-Vihan, ma mamm venniget,

Rag an deiz a zo degouezet ;

Or galv a ziston war benn ar mene',

Breiziz deuz pep parrez a ziskenn.

An oll

Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

O youahadennou a red 'dreuz d'an êr

Beteg goueled al lanneier.

Ar mammou a zegas o bugale

Da agodu o zadou en arme.

N'eus 'med eur youh, e Breiz penn-da-benn.

An oll

Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

Menez-Bre 'ro dorn da Venez-Kragou !

Tridal a ar o hribennou.

An oll

Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

Ane² o-unan o reier a ruill,

Gwagenn ar mor a lar d'ar wagenn :

An oll

Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

Beteg ar goulehiou, ar re bella

Ar horn a vrezel a vouda,

Hag a lar d'an oll boblou euz ar bed

Ema beo gouenn ar Vretoned.

An avel-mor yud en eur dremen :

An oll

Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

Kalonou an oll a zo entanet

Hag an divreh a zo nerzet.

Paotred Breiz-Vihan ha Breiziz tramor

² ahane.

A skoulm o daouarn dreist ar mor ;
Ollhalloudeg, ro 'n Treh d'az mibien.

An oll
Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

F. Jaffrennou (Taldir).

Ar Jikolodenn

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Eur zulvez o pourmen,
Hed da hed eur flourenn ;
Drant ha dibreder,
E klaskis eru skabell,
E goudor d'an avel,
War bordig eur ster.

En tu all d'ar sterig
E welis eur plahig
O kutuill bleuniou ;

Ha me chom amguzet
Gand ar c'hoant d'he gweled
Dre douez an deliou.

Ken koantig he haven
Gqand he chikolodenn
Warhe bleo du-pod
Hag he lagadig glaz,
Sklêr evel ar mor braz,
War drêz gwenn an aod.

P'he-devoa kutuillet
Pep seurt bleuñv marellet,
A-leiz he barlenn,
E skoulmas anezo
War eur brankig bezo
Gand eur vroënnenn.

H ag en eur o skoulma
He hleven o kana
War ar gurunenn,
Gand eur vouez ken seder
Ha mouez eun alhweder
Eur zonig laouen.

« Te, va hurunennig,
Em ano d'am dousig,
Te a lavar :
Ar olah am blañsonad
Da garo warhoaz,
Da garo atao.

« Va bleuniou a weñvo,
O hwez a dremeno
'Vel eur boull moged ;
Mez kalon da vestrez,
Rozenn a garantez,
A vleunio bepred.

« Ya, mignonig tener,
Keit ha ma redo 'r ster
War-zu ar mor don,
E chomo da ano,
Disklabez ha beo,
Moulet em halon.

« Keit ha ma ray brezel
Ar skoul d'an durzunell,
Ar bleiz d'an dañvad,
Me 'vago kasoni
'Eneb kement hini
'Ray dit kalonad.

« Keit ha ma richano,
War he bodig dero
Ar rouzardennig,
Me a gano ivez
Sonig va harantez
War bank va lochig.

« Kentoh e vo gwelet
Ar pesk o tilammed
War an douar leton,
Eged na dremenin,
Heb tridal ha c'hoarzin,
E-biou d'am mignon. »

J. Kere.

P'edon war bont an Naoned

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

P'edon war bont an Naoned
Digoudi digoudaon
Digoudaon ranflaon
Oeon taga raga diga diga daga
P'edon war bont an Naoned
'H en em zivertisa.

P'edon war bont an Naoned
War eul lestr o kana.

Me gweled eur plah yaouank
'Lez ar ster o ouela.

Ha me goulenn diouti
« Na perag e ouele ? »

« Va gwalenn aour, emezi,

Er mor a zo kouezet. »

Petra rafet-hu din-me
Me yelo d'he zapa. »

« Hanter-kant skoed, emezi,
Roin deoh a galon vad. »

'Vid ar genat ploñjadenn
Ar walenn 'zo touchet.

'Vid an eilved ploñjadenn
Ar walenn 'zo touchet.

'Vid an drede ploñjadenn
Ar paotr a zo beuzet.

E dad a oa er prenest,
A ziroll da ouela.

Tri mab am-eus-me ganet,
zri ez int beuzet.

E bered sakr an Dreinded
O-zri ez int beziet.

Kanet din gand F. Guillou, euz Kervaliant, eun niz d'an aotrou Guillou, ar skrivagner
braz.

J.-M. P.

War zao

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Lar din, petra rez-te³, Breizad,
E-pad ma youher : « Argad ! »,
E-pad ma youhe an dud fall :
« Brezel d'an Iliz ! », e Bro-Hall ?
Lar, din, petra rez-te, Breizad,
E-pad ma youher : « Argad ! »,
'Vel va bro Vreiz, me 'oa *atao*,
Sonn ha stard, me 'oa *war-zao*.

Ar roh morse ne bleg e benn,
Morse ne bleg an dervenn ;
E-kreiz kounnar ar gwall-barrad,
Roh ha dervenn a zalh mad.
Ar roh morse ne bleg e benn,
Morse ne bleg an dervenn,
Hag evelto me 'vez *atao*
Sonn mad va fenn ha *war-zao*.

Piou a oar stourm 'vel ar Breizad
Pa vez deut poent ar stourmad ?
Ar Breizad ne deho biken ;
Piou 'deh ? an trubard hepken.
Piou a oar stourm 'vel ar Breizad
Pa vez deut poent ar stourmad ?
Eur gwir Breizad a vez *atao*
E-kreiz an emgann *war-zao*.

Va dorn krog mad en eur penn-baz,
Me n'on bet trehet biskoaz ;
Kroaz va Doue war va halon,
Biskoaz me n'am-eus bet aon.
Va dorn krog mad en eur penn-baz,
Me n'on bet trehet biskoaz :
Leal ha gwirion, me 'vez *atao*
'Neb ar gaou, me 'vez *war-zao*.

Me 'gar va Bro, me 'gar va Breiz,
Me 'gar he yez hag he feiz ;
Ouz an neb 'ray dezi brezel
Me 'stourmo beteg mervel.
Me 'gar va Bro, me 'gar va Breiz,
Me 'gar he yez hag he feiz ;
'Vid he divenn, me 'vez *atao*
Evel va zadou, *war-zao*.

³ rez-te : "reas-te" : eur fazi yezadur zo er skrid orin. Ar memez fazi izelloh "youhent".

Pa vezo deut pred ar maro,
Dispont, dineh, me 'varvo.
Bebet am-bo e gwir gristen,
Mervel a rin heb anken.
Pa vezo deut pred ar maro,
Dispont, dineh, me 'varvo.
O soñjal e vo Breiz *atao*,
E vo Breiz bepred *war-zao*.

J. Cuillandre (Glanmor).

Dalh soñj, O ! Breiz-Izel, deuz an amzer
'Raoh ma oas gwerzet ha trehet,
Pa halle da vibien kerzed seder,
Sonn o fenn, dineh o spered.
'Raog ma oas bet taolet, heb divenn ha paour,
Dindan seuliou pounner an estren
Ha staget da viken deuz e garroñs aour,
Deuz da dreid ken tener eur chadenn !

Dalh soñj, O ! Breiz-Izel, deuz ar re goz
O-deus luskellet da gavell !
E peb traonienn ha war gribenn peb roz
E klevi o mouez en avel.
An aveliou a hwez war da blenennou
A zoug eneoù ar Vretoned,
Pere⁴ 'lavar dit bemdez en o hlemmou :
Dalh soñj euz da amzer dremenet !

Dalh soñj, O ! Breiz-Izel, deuz ar Morvan ;
Deuz Nomenoe, mestr dispar ;
Deuz da Rouanez, deuz ar priñs Alan ;
Dezu ar Zent 'deus greet da zouar ;
Deuz an Duked vad a houarnas ar vro
Ha deuz ano an dud-a-vrezel :
Deuz merdeidi ha Korserein Sant-Malo
A zougas dre ar bed da vanniel !

Dalh soñj, O ! Breiz-Izel, deuz ar Varzed
A ganas da yez dudiuiz !
Bennoz dezo, da yez a zo beo bepred,
Beo ar Brezoneg enoruz !
Dalhom soñj ! Dalhom da viken an eñvor
Deuz gloariou dispar on hendadou,
Ha n'eus forz pegeid e padfe Bro Arvor
Na zilezom biken o roudou !

F. Faffrennou (Taldir)
Doue ha Breiz
bepred !

⁴ Pere : fazi yez ; diouz ar galleg. Ar re